

An Itroun Vran, war he gwezenn kludet,  
 A zalc'he 'n beg fourmach gwenn.  
 Lân al Louarn, war e lost hir puchet,  
 A gomzas outi evel-henn :

*-Deiz mat deoc'h, Itroun Vran Eus Ar C'hoajoù  
 na c'hwi zo koant hiziv, ha kaer ho tilhajoù !  
 Mardouen ! Ma ouezit kanañ  
 ' Vel ma ouezit en em glinkañ  
 C'hwi zo gwir Rouanez laboused ar vro-mañ.*

Kerkent Bran Ar C'hoajoù, lorc'h en enni, sot atav,  
 Evit diskouez he mouezig vrav  
 A zigor bras he beg... Kouezet ar fourmach gwenn,  
 Tapet gant Lân en ul lamm krenn.



*-Itroun Vran,  
 Eme Dom Lân,  
 Ne ouiec'h ket 'ta  
 'Ranker atav paeañ  
 An enor hag ar meuleudi !  
 Ur gentel gaer em eus roet deoc'h-c'hwi;  
 N'eo ket paet re ger moarvat  
 Gant ur fourmach leun a c'hwezh vat!*

Ar vran, lostek, a douas, met diwezadig,  
 Ne vije tapet ken gant an trubard Lanig.